

# AR ROUE GRALON, K'ER IS

## AC ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGO

• A ha-mac' m'eo bouzet ker Is  
• Neus kel evet par da Itrio.



En Escopi Kerne, ol lec'h ems brema mór Douarnenez,  
voa gnechal eur guer vras meurbet, hanvet Is.

Eur voguer ledan ac huel, gant selujou houarn ho difenne  
deus ar mór. Er gaer-ze ne velet, e tonex an dud pinvidic,  
nomet dizurs, goall exempl a fallagriez. Gralon, pehini a cho-  
me neuze, en Is a voa Roue Breiz-Izel. Bet e voa brezeller en  
e yaouanquis, a rust en andret e zujidi; mes en e gosol, sele-  
rijemet dre ar feiz kristen, et tenas da veza douc, evel eun  
oan. Hirvoudi a re, alies var dizurson Is, a var ar vuez dirollet  
a roue e verc'h, ar brincès Ahès, gant an noblañc yaouanq a  
guer, a deus ar vro hanvet, hirio, Ker-Ahès, pehini a voa  
dozi a leve.

En anzer-ze, ive, e voa e Breiz-Izel, daou abostol santel,  
daou vignon da Zoue, Sant Caourentin, kenta Escop a Guemper,  
a Sant Guenole (1), kenta abad a Landevenneo; alies ho devoa  
prozeguet ar feiz er guer a Is, a gourdrouzet ar Roue Gralon,  
abalamour d'an droug-oberou, d'an torsejou a d'an Injustiçon  
a ret, bumedez, e pales e verch yaouanq; mes goall a ret  
suzo, ac ar Roue, simpleet dre an oad, neu devoa mui  
c'halloud avoalc'h evit arreti dizurson ker bras.

Done a skoizas, er fin, o velet Is caledet en e fec'hejou, ac  
a roas da anaout da El Breiz-Izel, e vignon, Guenole; penos,  
ob dale pell, ar guer gaer-ze a vije benzet gant ar mór. Ker-  
kent, Guenole a bignas var e varc'h, ac a redas da guer Is,  
o sonjal c'hoas dizarmi koler Done. Mæs tremonet e voa an an-  
zer a devez. Pa en om gavas an abad santel, var dro anter-nóz,  
selujou Is a voa digor, ac ar mór a c'brozo spontus, o treuilal  
var an dud, an tier ac ar palechou. Guenole ne allas  
savetei nemet Gralon eb ken; gnefet ar rer c'hoas rondou  
trôid e varc'h er garrek, var behini, abaoe, abaded Landé-  
venneo, arang kemer ho c'harg, a deu da ober ho fedou a da  
anaout ar Roue Gralon evit fondatour ho c'honent.

Ahès, mere'h fall ar Roue, kiriek a revio Is, a voe troet e  
*Mari-Morgan*, anter maouez, ac anter pesk. Pa bar aj loar, he  
c'hlever e hoas alies o eana, var mór Douarnenez, a uz revinou  
ar guer veuzet. He daoulagat a zo evel diou steredon, ho bleo  
evel an noar, he gouzong ac he diou vrôn ken guen ac an  
erc'h, ac e mouez melodins a laka da gonskat dre e chalmou;  
evel ze, martolodet ar vro, rætal m'he c'hlevout, a lavar ent-ezo,  
gant spouron: « Tec'homp, Ahès a zo savet deus he phalès,  
• ar guall anzer ne ma ket pell, a ma talcomp, e vezimp tolet,  
• kousket, var ar rehyer. »

Ker Is ne m'a mui, evel Sodôm, Gômor a Babylon; ac hi-  
rio ar mór a roull dreist he fen.

Da zag-heol Gralon, o veza pignet, gant Guenole, var lein  
Mené-Hôm, a dolas, ac hanô, eur zoll truezas var e lore'h;  
Mæs ellec'h ma edo ar guer gaer a Is, ne velas mui nemet mór

(1) *Guenoll-e, All-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-ze gant e  
van, ar Sante-*Yves*, abalamour na voa eur binguel eant a fur. Sant  
Guenole, dre e veuziou, en deus meritet an hanô eñer a El Breiz-Izel  
(L'Ange de la Bretagne).

649A

Douarnenez, ac e kouezas d'an daoulin evit trugarecat Doue ac ar Verc'hes da veza saveteet e vuez.

Pa zavas divar e zaoulin, e velas diudan an heol, o liguerni, *Ru-men-goudou*, pe *Men-ru-ar-goulou*, var pihini e vije sacrifici, tud veo, a heb mis, eur buguel bian, c'hoas eus ar eron. Neuze, beuzet en he zaëlon, ac e zaoulagad savet e trezeck an Eu, e lavaras d'e vignon santel :

« Var ar Men ru zont, consacret d'a eun Doue barbar, me a  
 « ral sevel eun Ilis caër d'ar Verc'hes, ac el leac'h ma skuiller  
 « ar goat da Teutatès, e skuillo Mam ar guir Doue he graçou  
 « var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bromessa, a beleyen ar Bayanet, o veza en em revoltet, pa veljont dispon templ an Doue faos Teutatès, ar Roue christen ho zehas e kever Argol, e pen ar Vretonet convertisset.

Goude beza gret e beden, var Mene-Hôm, ar Roue Gralon a heuilas Guenole da Abaty Landevennec, savet gantan, eun neubeut blaveziou kentoc'h. Diarauc kement-ze, en devoa, c'hoas roët e balès, e Kemper, da Sant Caourentin, pehini en devoa torret e naon dezan, a de compagnones, gant eun tam deus e besk bian. E plaç ar palès-ze, e ma brema ilis caër cathedral Kemper.

Gralon a dremenas, e Landevennec, ar rest eus e vuez, en eur binigen galet, ac alies e ze gant e vignon ker da Remengol, da bedi evit e bobl, an *Itron Varia Remed-Oll*. Beza en devoa an eur d'he guélet brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel, ac o vervel etre divrec'h Sant Guenole, e Landevennec, e recomande e ene da Zoue, en eur lavaret gant fiçians :

« Itron Varia Remengol,  
 « Mirit ouzin na zin da goll. »

C'houezec kant vloas a zo, a buone, ma e maro Gralon, ac ar Vretonet, pere zo, bepret, tud a feiz ac a galon, ho deus c'hoas sonj eus ho Roue coz, ac eus e vignon, Sant Guenole. Maes ma c'hanavefent guelloc'h histor ho bro gaër, pa zeont da zul an Drindet, da bardon bras Remengol, a pa velont môr Douarnenez, Mene-Hôm, Landevennec, a tour huël Ilis miraculus an *Itron Varia Remed-Oll*, e lavarfeut, an daëlon, en ho daoulagat, en eur vale gant respet, var douar ar Scentac ar Rouane :

« Bras ar burzudou a zo bet,  
 « Ebars en amzer dremenet !... »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas, hirio, an Itron Varia Remengol, en andret an oll Vretonnet, ac ispicial, en andret ar beferinet a dea, bemde, d'he guélet, alies eus a bell bro, a calç anezo, diarc'hen, ac e corf ho rochedou.

Ar vignoret dilezet, an intanvezet paour, ar beorien noas, soudardet Breiz-Izel, e creis tân ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras e furol, an oll dud alliget, a gorff, a galon ac a speret, darn en ho foaniou, darn en dangerrion, darn all en dizesper, a darn, ive, var gouele ar maro, ho deus sonj eus ho mam douç a mad, ac alies e leveront dezi, gant carante a gant fiçians en he galloud, ac en he madelez.

« Itron Varia Remengol, patronez Breiz-Izel,  
 « Pedit evidomp, hirio, a pa rankimp mervel ;  
 « Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet,  
 « Ho deus ho caret, ho car, ac ho caro bepret. »

# GUERS

## AR ROUE GRALON A KÆR IS.

*Var ton Judic ac Holofernez; pe var ton Bocen Elltant.*

I.

Petra 'zo 'neve e kær Is,  
M'ar de kent drant ar yaouankis,  
M'ar clevan-me ar binion,  
Ar vombard ac an delennou ?

N'eus e kær Is netra neve,  
Rac ar festou-ma've bemde,  
N'eus e kær Is nemet traou coz,  
Rac ar festou-ma've bemnoz.

Bojennou drez zo divoannet  
E dor an ilizou serret,  
A, var ar beorien o voçla,  
E losker ar chaçz d'ho drailla.

D'ho c'hozek vla, an oll verc'het  
N'ho deus Doue, met ar pec'het  
A, da ober e gurunen,  
E roont ho c'haëra rosen.

Ahès, merc'h ar Roue Gralon,  
Tân an ifern en he c'halon,  
Er pen kenta deus an diroll,  
A drein d'he c'heul ar gær da goll.

Sant Guenole, gant kalonad,  
So bet m'eur vec'h e kaoût he zad,  
A, gant daëlou, an den Doue :  
En eus lavaret d'ar Roue :

- \* Gralon, Gralon laka'eyes
- \* D'an dizurzon a rén Ahès :
- \* Rac tremenet vo an amzer
- \* Pa skuillo Doue e goler.

- \* El lec'h m'a voa c'hoarzadek-kent,
- \* E vo neuze skringnadek dent,
- \* El lec'h ma voa kanouennou,
- \* E vo clevet skrijadennou !... \*

Ac ar Roue far, spouronet,  
E verc'h en deus bet kelennet :  
Mæs, diskaret dre ar gosui,  
N'eus mui an ners da stourm outi.

— 4 —

A, skuis gant rebechou he zad,  
Evit m'ont d'eus e zaoulagad,  
Hi 'deus gret, gant droug sperejou,  
Eur palès caër tost d'ar selujou.

Eao, gant he amourouchen,  
Ema fenos an abaden,  
Eao, en aour ac er perles,  
Evel an heol, e par Ahès...

## II.

\* Plijadur dec'h er palès-man,  
\* Merc'hed chentill a potred skan,  
\* Plijadur dec'h a nosvez grèn,  
Eme eur Prinç en eur autren,

Ar Prinç a zougue dillat ru,  
E varo a voa hir a du,  
E oll izili a verve,  
Ac e zaoulagad a zeve.

Ra viot deut mad, estranjour,  
Eme Ahès gant eur bek flour,  
Ia, ra viot deut ar goëlla,  
M'ar c'hanveit an traou falla.

Neuze em ho digomer mad,  
A respontas an divroad :  
Rac me er fall zo ken disket  
Ac an hini n'eus er c'hrouet.

A kerkent Ahès d'er pedi  
Da ober eun dro zañz ganti,  
Ac an oll, a eneb Doue,  
Goassa m'a c'hallent a doue.

Pa voa d'an abaden-ze fin,  
Danser Ahès, en eur c'hoarzin,  
Ac en eur zével e zion skoa,  
A lavaras : « n'ouzoc'h netra !..... »

\* Kerc'hit din-me deus a gar Is  
\* Vesseillou zantel an Ilis,  
\* Kerc'hit croas ar c'hrucufiet  
\* Eun hosti sacr, ac e velfet !.... »

Ahès a respontas timad :  
« Cavet, vint e chapel va zad,  
\* Rac va zad diot c'hoas a gred  
\* En trompler-ze à Nazareth !.... »

Tri a redas e berr amzer,  
Ac a ziskaras an Auter,  
Ac an traou sacr a voë douguet  
Etre daouarn du ar pec'het.

Ar prinç ru, ractal m'ho guelas,  
A greis e galon a c'hoarzas,  
Ac a lavaras c'hoas ennan :  
\* Plijadur dec'h er palès-man !.... »

— 5 —

Da guenta, a doliou boutou,  
E vrijunas ar vesseillou,  
Goude'fastras ar gruçufi,  
Ac e krenchas var an hosti !....

A varne, gant an oil e noas,  
En eur gana : « Mallos d'ar groas ! !.... »  
E ras, e seis stum dishenvel,  
Dansou ar seis pec'het marvel.

Kerkent ar palès a grenas,  
Ac ar c'hurunou a strakas,  
Ac, a dreus ho zellou nec'het,  
E skôas tân glas al luc'hed.

« N'a c'houi vel, eme ar Prinç ru :  
» Me laka Doue var e du !.... »  
Ma lavarent oll gant glac'har :  
Ahès he deus kavet he far !....

## III.

Pa voa fin dar sacrilejou,  
Messenger an droug sperejou,  
Chomet e eunan er palès,  
A dostaas da gaout Ahès :

« Va douçik koant, merc'h da Gralon,  
» A muià karet va e'halon,  
» A nalfen me ket eueb guis  
» Guelet alc'houe skujou kær Is. »

— « Va zad a zoug en e guerc'hen,  
» An alc'houe aoûr deus eur chaden,  
» A va zad brema zo kousket,  
» A kaout an alc'houe n'allan-ket. »

Mæs en d'he zreid a'neun strinkas,  
A d'he dornik flour a bokas,  
Ac he chalmas dre e zellou  
Carguet a dãn ac a zaélou.

## IV.

Heb goud ar pez a dremene,  
Neuse, eur pennad ac'hane,  
En e balès, ar Roue kos  
A voa kousket e creis-an nos.

Kampr paour Grafôn ne voa enni,  
Netra nemet eur gruçufi  
Deuet a zorn eur mignon ker,  
Sant Caourentin, Escop Kemper.

Netra nemet eun Ariel,  
Roët e'boas gant eun den zantel,  
Roët dean gant Guenole,  
Evel eur merk a garante.

— 6 —

Kaër en e gosni, 'vel eun Ael,  
E kouske Roue Breiz-Izel,  
Ac, en dro d'e dall, e vleo guen  
A re, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahès, ar Brincès fall,  
Evel pa vije skoët dall,  
En e gampr, eb aon 'rag Doue,  
A deu da laères an alc'houe.

En eur vale, var bek he zroad,  
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,  
A goustadik, deus e guerc'hen,  
E tenn, n'eur c'hoarzin, ar chaden.

V.

Piou a deu duont gant ar ru,  
Pignet var eun hinkane du,  
Ac en d'an daou lamp var e gweñ ?  
Ken a strink an tân deus ar veñ ?

Hennes eo messenger Doue,  
Digasset en Is dar Roue,  
Hennes eo abostol ar Feiz,  
Sant Guenole, karet e Breiz.

Tostât a ra n'eur c'haloupat,  
En e zorn deo e vaz Abad,  
Ac eur stôl aour var e zaë ven,  
Ac eur c'heñc'h tân en dro d'e ben.

N'eur gavet e d'ôr ar palès  
E pini e kousk tad Ahès,  
Divar e varc'h, an den santel  
A o'halv, en nos, a voës huel :

• Gralon, Gralon, sao heb dale,  
• Sao evit heñilla Guenole,  
• Sao evit tec'het deus ar môr :  
• Sklujou Kær Is a zo digor ! •

Ac ar Roue kos, trubuillet,  
Er mes e vele zo saillet :  
« Dia-me, dia-me, va marc'h prima !... »  
» Siouas ! Peargollet ar guær ma !... »

A gant glac'har, e ber amzer,  
E kerz da heul e vignon ker,  
A, var ho lerc'h, en eur hyudal,  
E klevont ar môr o ruillal.

Neuze ar Brincès dirollet,  
He amourous ganti kollet,  
Dre guær Is, a glei ac a zoe,  
A rede, dispaket he bleo.

Mæs pa gleo daou lamp ar c'hezek  
Arang ar môr e tiredek,  
Dre al luc'bed, gant nec'hamant,  
E c'hanve he zad ac ar zant.

— 7 —

\* Va zad, va zad, ma em c'harit,  
 \* Var ho marc'h skan va c'homerit :  
 Ac, eb respont, an tad tener  
 A zav e verc'h var au tailler.

Kerkent ar môr a vuanna,  
 A Guenole, en eur grena,  
 A gri : \* Gralon, tól an diaoul-ze,  
 \* Divar dailler da hinkane !... \*

Kouskoude c'hoas, leun a enkres,  
 An tad a zalc'h ar bec'heres :  
 Mæs ar sant a ra sin ar groas  
 A deu ac a sko gant e vaz.

Kerkent mestres an droug speret  
 A ruill er môr bras fuloret,  
 Ac e cleo tost ar Roue kos  
 Eur c'hoarzin skiltr' e creis an nos.

Mæs, rentet skanvoc'h, heb dale,  
 E saill prim da c'heul Guenole,  
 Ac e vare'h, gheb e beder c'harr,  
 A lamp deus ar môr en douar.

## VI.

Da zao-heol, ar Sant a Gralon  
 A bigne var lein Mene-Hôm,  
 Pini, e dreid ebars en trez,  
 A zao a uz Douarnenez.

Ac'hane, Roue Breiz-Izel  
 Var e lerc'h a dolas eur zel :  
 Mæs, el lec'h is, gant he dek dor,  
 Ne velas mui nemet ar môr.

\* Eur guer em boa deus ar gaëra,  
 \* A cetu hi et da netra !... \*  
 Ac e galon oll a fraillas,  
 Ac e zaoulagat a voëlas.

\* D'an daoulin, eme Guenole,  
 \* Gralon, d'an daoulin ganem-me. \*  
 A Gralon, dindan e c'blac'har,  
 A goë d'an daoulin d'an douar.

Ac eno, dispak e vleo guen,  
 Ac e dall pleguet er baultren,  
 E lavare c'hoas ar Roue :  
 \* Ra vo gret bolonte Doue !... \*

Pa zavas divar e zaoulin,  
 Dindan tân flam heol ar mintin,  
 E velas, a dreuz e zaélou,  
 O luguerni *Ru-men-goulou*.

Var ar men-ze, hon tadou kos  
 A skuille goad d'eun Doue fos,  
 Ac ar Roue, e ber amzer,  
 A lavaras d'e vignon ker :

- » Du-ont, e memor a guer Is,
- » Me a rav sevel eun Iis,
- » Ac, evit testeni d'an oll
- » M'he galvo Iis Remengol (1).
  
- » Pa vo an doneou maro,
- » A koët mear a goat dero,
- » Eun de, dens ar pevar avet,
- » E teñio d'y, pobl Breiz-Izel.
  
- » Rac var-dolmen ru Tentatès,
- » Me lakei da rën ar Verç'hies,
- » Ac, evit henori ar Groas,
- » E c'hordrenin eur pardon bras.
  
- » Eno, an oll dud affiget
- » A gavo d'ho founion remed,
- » A silvidiguez d'ho ene,
- » Dre c'haç Mari, guir vant Doue.
  
- » Neuze, m'ar be sonj a Gralon,
- » E vo lavaret a galon :
- » Bras ar burzudou a zo bet
- » Ebars en amzer dremenet !...

## Peden ar Roue Gralon.

Itron Varia Remengol,  
Mirit ouzimp na zaiimp da goll :  
Pedit ive, ho mab Jesus,  
Ma vezimp gantan evurus.

— Itron Varia Remengol,  
C'hui eo Ronanèz ar bed oll,  
C'hui eo hor mam, hor Batrones,  
A ni ho meulo da jamès.



(1) Remengol, hanvet gouechal, *Ru-men-goulou*, da lavaret e, *Men-ru-ar-goulou*, abalamour ma voa, eno, eur men ru, pe eun templ, consecret da c'haalon De, eooret evel eun Doue, dindan an lano à Tentatès (Douc-Tad) ar Roue Gralon, goude beza discaret an templ-se a savet, en o blaç, eun Iis caër da vam ar guir Doue, a c'hanchas hano payen *Ru-men-goulou*, en lano christen a *Remengol*, da lavaret e, *Remed-oll*, d'eus a behini ar Batrones a zo hanvet an *Itron Varia Remed-oll* (*Notre-Dame de Tout-Remède*) abalamour dar burzudou bras a ra bemdez, eno, ar Verç'hies, a haoue amzer ar Roue Gralon, betec hizio.

Eno, zo c'hoas induljançon ar re vrassa necoret gant hon tad santel ar Pab, d'an oll gristenien, a deu da Remengol, da hidi, a galon, Patronnes Breiz-Izel.